



David ar ROUZ

*Tro ha distro,  
dorioù digor war ar bed*

*Troiñ ha servijoù nesañ  
Pep sort danevelloù*

## Jubenniñ brezhoneg

### *Stummadur pad micherel*

Er blez 2012 e oa daet àr-wel ar jubenniñ èl un doare jaojabl d'aoziñ divizoù e brezhoneg get nann-vrezhonegerion e meur a zegouezh : Emvod ar Gelted en Oriant, bodadoù-labour àr ar brezhoneg Ti Douar Alre, ar c'hollok aozet e Karnag get ar gevredigezh diwezhañ-mañ e miz Gouel Mikael, emvodoù kuzul-meriñ Kerlenn Sten Kidna. Se zo kaoz e oa bet divizet preniñ dafar a-sort get kani Ofis Publik ar Brezhoneg, prestet en holl zegouezhioù-se.

Dav eo lâret, neoazh, e oa bet graet ar jubenniñ seul taol get daou zen hepken. Evit bout sur e servijo an dafar koustus bet prenet eh eus afer a jubennerion arall. Ar mare mat eo enta 2013 da gannig ar stummadur da heul.

### 1. Get piv ? Evit piv ?

#### 1.1. Aozadur

Kerlenn Sten Kidna en Alre hag an Institut de Perfectionnement en Langues Vivantes (IPLV) a skol-veur gatolik ar c'hornôg (UCO) e Anjev.

#### 1.2. Stummerion

David ar Rouz (KSK), troour ha doktor àr skiant an troiñ (skiantoù al lavar).  
Anita Le Couédic (IPLV), jubennourez ha kelennourez, e karg ag an diplom àr ar jubenniñ liammiñ.

#### 1.3. Studierion

Tud daet, uhel a-walc'h o live brezhoneg ha galleg. **10 den d'ar muiañ.**

### 2. Perzhioù ar stummadur

#### 2.1. Pad

Àr-dro **36 eurid** en holl, dasparzhet e c'hwec'h devezh.

#### 2.2. Pal

Kompen ha pleustriñ sortoù jubenniñ dishañval, evit gallet o c'hannig èl un den a vicher :

- jubenniñ liammiñ
- jubenniñ kuzuliket
- jubenniñ àr ar prim
- troiñ a-daol-lagad

#### 2.3. Yezhoù

Ag ar brezhoneg d'ar galleg, hag en tu kontrol (jubenniñ liammiñ)  
(+ a yezhoù arall d'ar brezhoneg, hrevez live ha c'hoant ar berzhidi ha hrevez an amzer)

#### 2.4. Disoc'h

Roet 'vo un testeni stummadur d'ar berzhidi hag a lâro evit pesort jubenniñ e vint daet da vout barrek. Sinet e vo asamp! get Kerlenn Sten Kidna hag an IPLV.

**David ar ROUZ**  
*Tro ha distro,  
dorioù digor war ar bed*

### 3. Program dre ar munud

#### 3.1. Deiz kentañ : kompren ar vicher ec'h ober

E sal Kerlenn Sten Kidna (6 ru Joseph Rollo) en Alre.

Eur	Danvez	Diàr	Stummour/Dafar
10 e-10 e 30	Digoriñ : eskemm àr ar jubenniñ, un nebeud gerioù da dermeniñ ar sortoù jubenniñ		David ar Rouz (DaR)
10 e 30-11 e 10	FR > FR	Pennadoù-skrid	
11 e 10-12 e 10	FR > FR	C'hoari roll	
12 e 10-12 e 30	Eskemm		
2 e-3 e 30	Jubenniñ liammiñ BR <> FR	C'hoari roll	
3 e 30-3 e 45	Eskemm		
3 e 45-4 e	Ehan		
4 e-5 e	Jubenniñ kuzuliket BR > FR	Pennadoù-skrid	
5 e-5 e 30	Eskemm		

#### 3.2. Eil deiz : teorienn ha goulennoù get ur jubennourez a vicher

Eur	Danvez	Diàr	Stummour/Dafar
10 e-10 e 30	Digoriñ : prezantiñ		Anita Le Couédic (3 euriad)
10 e 30-11 e 15	Jubenniñ liammiñ	Teorienn ha skiant-prenet, goulennoù ar berzhidi	
11 e 15-11 e 45	Troiñ a-daol-lagad		
11 e 45-12 e 30	Jubenniñ kuzuliket		
2 e-3 e	Jubenniñ àr ar prim		
3 e-3 e 30	Kloziñ : eskemm, goulennoù diwezhañ		
3 e 30-3 e 45	Ehan		
3 e 45-5 e 30	Jubenniñ liammiñ	C'hoari roll	DaR

#### 3.3. Trede deiz : pleustriñ ar jubenniñ liammiñ ha kuzuliket

Eur	Danvez	Diàr	Stummour
10 e-10 e 40	FR > FR	Pennadoù-skrid	DaR
10 e 40-12 e 30	Jubenniñ liammiñ get eskemm	C'hoari roll	
2 e-3 e 30	Jubenniñ kuzuliket	C'hoari roll	
3 e 30-3 e 45	Ehan		
3 e 45-5 e	Jubenniñ kuzuliket	Kollok Karnag (video)	
5 e-5 e 30	Eskemm		

#### 3.4. Pevare deiz : monet pelloc'h get ar jubenniñ kuzuliket

Eur	Danvez	Diàr	Stummour/Dafar
10 e-12 e	Jubenniñ kuzuliket FR/EN/ES... > BR	Predegennoù (video)	DaR/Malizenn
12 e-12 e 30	Eskemm		DaR
2 e-3 e 30	Prientiñ : termenografiezh, klask dielloù	Temoù : an digreizenniñ, ar c'helenn, an enbroidi, ar sonerezh...	DaR/Geriadurioù hag urzhiaerioù
3 e 30-3 e 45	Ehan		
3 e 45-5 e	Jubenniñ kuzuliket BR > FR	C'hoari roll àr an temoù a-us	DaR/Malizenn
5 e-5 e 30	Eskemm		DaR

**David ar ROUZ**  
Tro ha distro,  
dorioù digor war ar bed

### 3.5. Pempvet deiz : jubenniñ àr ar prim

E Anjev evit implijout logelloù.

Eur	Danvez	Diàr	Stummour/Dafar
10 e-10 e 30	Monet en-dro ar logelloù		Anita Le Couédic
10 e 30-12 e 30	Jubenniñ àr ar prim	Predegennoù prientet get pep hani	DaR
2 e-3 e 30	Jubenniñ àr ar prim	Predegennoù prientet get pep hani	
3 e 30-3 e 45	Ehan		
3 e 45-5 e	Jubenniñ àr ar prim	Predegennoù prientet get pep hani	
5 e-5 e 30	Eskemm		

### 3.6. C'hwec'hvet deiz : validiñ

E Anjev evit implijout logelloù.

Eur	Danvez	Diàr	Stummour/Dafar
10 e-12 e 30	Validiñ ar jubenniñ liammañ hag an troiñ a-daol-lagad	C'hoari roll	Anita Le Couédic & DaR
2 e-3 e 30	Validiñ ar jubenniñ àr ar prim	Predegenn video	
3 e 30-3 e 45	Ehan		
3 e 45-5 e	Validiñ ar jubenniñ àr ar prim pe kuzuliket	Predegenn video	
5 e-5 e 30	Kloziñ : titouroù micherel		

### 3.7. Deiziadoù kanniget

Setu an deiziadoù kanniget :

- 15 ha 22 a Vezheven : devezh kentañ en Alre, eil devezh e Arradon ;
- 8 ha 9 a viz Gouhere en Alre ;
- 11 ha 12 a viz Gouhere e Anjev.

## 4. Priz ha kontrad

### 4.1. Talvoudegezh ar stummadur

Gopr ar stummerion = 1962,50 €

Furm ar sal jubenniñ evit 2 zevezh : 2 x 290 = 580,00 €

Frejoù hent :

- Anjev-An Alre : 430 x 0,5 (hrevez an oto) = 215 €
- An Oriant-Anjev : 500 x 0,5 (hrevez an oto) = 250 €
- An Alre-Anjev : 430 x 0,5 (hrevez an oto) = 215 €

Frejoù boued :

- Eil devezh : 12 x 15 = 180 €
- Pempvet ha c'hwec'hvet devezh (kreisteiz) : 12 x 15 x 2 = 360 €
- Pempvet ha c'hwec'hvet devezh (noz) : 11 x 15 = 165 €
- Herberc'hiñ : 400 €

Priz hollek : 4 327,50 €

Priz dre zen get ur strollad leun (10) : 432,75 €

Priz dre zen get ur strollad 8 den : ≈ 500 €

**David ar ROUZ**  
*Tro ha distro,  
dorioù digor war ar bed*

#### 4.2. Kontrad

Ar stummadur a c'hell bout paeet get ur gevredigezh. En eskemm e c'hrata an dud stummet jubenniñ a-vat eviti **5 hanter-zevezh** pe oc'hpenn. Un hanter-zevezh a vo kontet èl lan pa vo labouret etre div ha peder euriad. En tu arall da beder euriad e vo kontet un hanter-zevezh arall.

Gellet a ray bout kreskaet priz ar stummadur dre zen, hag an niver a hanter-zevezhioù dleet da heul, ma n'eo ket laniet ar strollad (da lâret eo ma vez bihanoc'h evit 10 den enni). Nullet e vo ar stummadur ma ne vez ket lakaet o anv get 8 den d'ar bihanañ.

D'ar gevredigezh e vo aozañ galv an dud stummet hrevez he doberioù, dijaplte an dud o-unan hag an niver a hanter-zevezhioù graet get pep hani, evit ma vo achu ar c'hontrad get ar jubennerion ar memp blez mard eo posubl.

En tu arall d'ar c'hontrad-se e c'hrata an dud stummet faturenniñ o servijoù hrevez akustumañs an dud a vicher pa vint e jubenniñ er-maez ag ar c'hevredigezhioù eh int ezel a youl vat anezhe, é ouiet **n'hell ket an dud stummet hrevez termenou an destenn-mañ lâret o deus an titl a Jubennour predegennoù ha neuze goulenn ar memp gopr èl ar rummad labourerion-se.**

Gellet a ray an dud paeiñ o stummadur o-unan m'o deus c'hoant, èl rezon, d'ar priz a vo divizet da vat da **dermen ar galv d'emstriviñ, lakaet d'an 31 a viz Mae 2013**. Ne vint ket dalc'het neuze get termen ar c'hontrad-mañ. Grataat a reont èlkent faturenniñ o servijoù goude ar stummadur, kuit da geveziñ en ur feson displeal doc'h ar jubennerion arall.

#### 4.3. Lakaat hoc'h anv

Evit lakaat hoc'h anv, kasit (pe goulennit get ho kevredigezh kas) ur chekenn a 150 € da gKerlenn Sten Kidna (6 ru Joseph Rollo – 56400 AN ALRE), èl ul lodenn a briz ar stummadur. Ne vint ket restaolet ma larehec'h ne vehec'h ket perzh er stummadur bihanoc'h evit pemzektez e-raok an devezh kentañ. Kasit doare din ivez dre bostel, ma virehen ho lec'h.